

— 5 —

Ar C'hernevet.


Ne allân mui contesti , cedi a rân ganez ;
 Ne qet possubl resistia eneb ar virionez.
 Me a baeo boutaillad eus a greis va c'halon
 Evit en em udani ganez , pot a Leon.

Al Leonard.

Cetu ni camaradet , ar C'hernevot ha me ,
 Ne vezoz den incredul demeus a guementse.
 Un dra zo bet prouvet dirac calz eus a dud ,
 Ar rezon-mâ a fiuis etrezo an Disput.

Al Leonard hac ar C'hernevet.

Ar son-mâ so compost gant ur Breiziad farcer ,
 A hanavez tud Qerne , re Leon ha Treguer ;
 Oll int lapinet subtil , mignonet a fêçon ,
 Hac en ped amzer oll diga eus an titr a Vretou .
 Hac en peoc'h hac en brezel o deus ar santimant
 Eus a botret courajos , dudius ha vaillant ,
 Ha mar be ret dê un deiz , nens fors en pez tachen ,
 E vo cavet adare *Celtiget tor-e ben.*



AR C'HEMENER.

Var ton : *Calz a amzer ameus collet.*

Eur C'hemener ne deo qet den ,
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
 Eur C'hemener ne deo qet den ,
 Neo nemet eur C'hemener hepqen.

— 6 —

Ne dle qet beza entéret,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Ne dle qet beza entéret
Nac en ilis nac er véret.

Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,
Oll chass ar baros var e lerc'h.

Ha peb a gaz ha peb a gui ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Ha peb a gaz ha peb a gui
Peb a lunedou var o fri.

Ha peb a fleur en o guinaou ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Ha peb a fleur en o guinaou
Da gana Requiem da vuntrer al laou.

Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,
E carg e sac'h a vesqennou.

Evit ma laro ar merc'het coant ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Evit ma laro ar merc'het coant ;
Ar C'hemener en deus arc'hant.

Pa ha'r C'hemener da e'hriat ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Pa ha'r C'hemener da c'hriat ,
Ne ra nemet cana ha c'houitellat.

Nemet cana , cravat e ben ,
Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;
Nemet cana , cravat e ben ,
Ha muntra al laou hac ar c'hoen.
